

# DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

*Yac'h-pesk on !*

*Yac'h-pesk ! Kadarnaet eo gant disoc'hoù an arnodenn  
yec'hed.*

*Bremañ e vo staliet ar grug elektronik ennon.*

*- « Ne raio ket droug deoc'h » eme ar c'hlañvdiour.*

*Da gousket e vin lakaet.*

*Ha warlerc'h e c'hellin mont ha dont hervez va ezhommoù  
: labourat, konsumiñ, abuziñ va  
amzer vak ha diskuizhañ. Pep tra a zo programmet  
e-barzh ar grug.*

*Evit mont da vakañsiñ e tibabin ur greizenn e-touesk ar re  
kinniget gant ar gouarnamant keit e  
vimp yac'h.*

*E gwirionez emeon o c'hedal ar virus, an hini a zegaso ur  
c'hleñved red d'ar reizhad stlennegel,  
an hini a lako ac'hanon da vezañ digabestr da vat.*

*Elisabeth*